




BREIZH : C'HWEZH AN AMONIAK ER MAEZ

Amoniak dilaosket e Breizh

Ar pezh 'vez jedet dre gumuniezh kumunioù hag ar re bennañ o tilaoskañ amoniak



GWISKET E RUZ EO BREIZH.

Kement a atantoù da zisevel loened 'zo, hag eo Breizh ar vro an hini pennañ o tilaoskañ amoniak e Frañs. Ha gant ar gaz-se, krouet rannigoù-munud en aer... hag a lazh dekvedoù a viliadoù a dud bep bloaz. Ankenius eo evit yec'hed an dud, ha hent-all e weler sklaer dija pegen mantrus e c'hell bezañ evit an endro. Met n'eo ket evit-se emañ Breizh o toujañ eus sturiadoù Europa da geñver an amoniak : war washaat e c'hello mont saotradur an amoniak en aer d'ar bloavezhioù da zont er vro. Abalamour d'ar re a fell dezhe gounit arc'hant kousto pe gousto... Ha zoken ma vez aet a-enep al lezhenn gant lod a industriourien evit en-ober.


BREIZH,

AR VRO A ZILAOSEK AR MUIAÑ A AMONIAK E FRAÑS

Breizh eo ar vro a zilaosk ar muiañ a amoniak e Frañs. Pep kelc'h a ziskouezh ar c'hementad dilaosket a zo bet disklêriet eo 2019 gant an embregerezhioù labour-douar hag an uzinoù (ar re a zo renablet e sturiad IED). El labour-douar, n'eus nemet ar magerezhioù moc'h gant ouzhpenn 2000 loen, hag ar c'hluvier gant ouzhpenn 40 000 a blasoù. Da lâret eo 'zo un diouer a ditouroù memes tra, ne weler ket ar c'hementad a vez dilaosket en holl : an antantoù bihanoc'h hag ar re zindan 10 tonenn a amoniak ne vezont ket kemeret e kont amañ. Ha lod a uzinoù n'int ket evit doujañ diouzh ar reolennoù, o chom hep disklêriañ pep tra, e-giz ar pezh a lenner en hon enklask.

An embregerzh kimik Yara e Mouter al Loc'h n'emañ ket war ar gartenn ivez. Mann ebet, setu ar pezh a zo bet disklêriet ganti e 2019. Koulskoude eo 161,8 a donennoù hag a oa bet dilaosket ganti (keitad) bep bloaz etre 2003 ha 2018... da lâret eo kalz muioc'h eget pep kelc'h a zo war ar gartenn.

Gwelet e vez ivez ar pezh a vez dilaosket dre gumuniezh kumunioù, hervez ar renabl labour-douar. Eus an tems, an dourc'hanvouez hag an teil e teu an amoniak-se dreistholl. Mod-all, gant an titouroù Copernicus e vez diskouezhet ar c'hementad a amoniak en aer er prantad 15 a viz Meurzh-15 a viz Even 2020, pa oa bet tizet ur saotradur uhel a rannigoù-munud... e pad mare ar c'henfinañ.



[>> Consultez la carte interactive en cliquant ici](#)



LODENN 1

E BREIZH EMAÑ AN AMONIAK O LAZHAÑ DIDROUZ

Pet a dud a varv abalamour d'an amoniak e Breizh ? Diwar al labour-douar e sav ar gaz-mañ evit 95% anezhañ. Ha hemañ orin eus ur saotradur bras en aer, gant elfennoù moan, orin eus krign-bev ha kleñvedoù ar galon hag ar gwazhioù. Poent bras eo pleal gant se evit yec'hed an holl hag an en-dro, met daoust da se eo dister ken ha ken an ostilhoù eveshaat en Breizh. Ha se dre na vez ket postet trawalc'h a arc'hant foran en se.



LODENN 2

INDUSTRIELERIEH HA STROLLEGEZHIOÙ O C'HOARI DA-VAT EVIT AN AMONIAK

Daoust d'an dañjerioù evit yec'hed al labourerien, an dud diwar-dro hag an en-dro e tremen Breizh hebiou d'an dalc'h stag ouzh an amoniak. Disteraet gant ar strollegezhioù ha bed ar gonezvouederezh ec'h a ar skarzhañ NH3 war washaat a-blasoù. Ha gwashañ tra e vez sikourioù publik bras d'ar saotrierien vras, darn anezhe e-maez lezenn.



LODENN 3

TEMZ HAG AMONIAK MASKLET E SANT-MALOÙ

Iskevredad eo an Timac eus ar stroll roullier, ur pezh embregerezh gwerzhañ temz. Didrouz eo bet diorreet e labour aozañ temz diwar azot e Sant-Maloù. Pemzek vloavezh ur produiñ risklus-kaer, hep bezañ gwelet. N'eo diwallet nemet abaoe 2017, goude bezañ dilesket ur gaz saotrus, an amoniak, betek pemzek gwezh muioc'h evit an norm aotreet. Sed amañ ur sell war un hir a vankadenn a-berzh ar galloudoù foran.

LODENN 1

E BREIZH EMAÑ AN AMONIAK O LAZHAÑ DIDROUZ

Pet a dud a varv abalamour d'an amoniak e Breizh ? Diwar al labour-douar e sav ar gaz-mañ evit 95 % anezhañ. Ha hemañ orin eus ur saotradur bras en aer, gant elfennoù moan, orin eus krign-bev ha kleñvedoù ar galon hag ar gwazhioù. Poent bras eo plediñ gant se evit yec'hed an holl hag an endro, met daoust da se eo dister ken ha ken an ostilhoù eveshaat en Breizh. Ha se dre na vez ket postet trawalc'h a arc'hant foran en se.


Emañ Breizh er penn uhelañ, kaerat tra ! Evit a sell saotradur an aer... N'eus eus ar vro amañ nemet 5 % eus tachenn Frañs, ha daoust da se kentañ bro er Stad o leuskel un aezhenn, an amoniak, dañjerus-daonet, war a lâr medisined, kevredigezhioù difenn an endro ha betek labourerien-douar o-unan. Seizh vloaz zo e vez eveshaet an danvez saotrañ-mañ gant loareloù europat. E miz Meurzh ha miz Ebrel, d'ar c'houlz ma vez skuilhet hañvouez ha temz e vez ar vro e ruz.

En ur studi amerikan embannet d'an 10 a viz Mae 2021 en aktoù akademiezh vroadel ar skiantoù er Stadoù-Unanet (PNAS) zo embannet gant pevarzek enklasker penaos e vefe al labour-douar a-greñv kaoz da varv 17 900 a dud dre vloaz er Stadoù-Unanet, 69 % anezhe o vezañ diwar an amoniak. An hini kentañ eo an enklask-mañ o lakaat war gont ar produiñ ha debriñ boued ar fed e vefe lazhet tud diwar saotradur an aer. « Splannoc'h-splann eo ar skioù war ar yec'hed hag an endro gant ar magañ muioc'h-mui a dud dre ar bed », eme an enklaskerien.

Miliadoù a dud varv gant an amoniak

6 % eus an douar-labour talvoudus vroadel zo da Vreizh. Ha 57 % eus ar chatal hag ar produiñ moc'h en Frañs, dreist pep lec'h en Aodoù-an-Arvor ha Penn-ar-Bed. Ur penn-yar diwar dri a vez o tont eus Breizh ha 19 % eus ar stalioù ober laezh zo e Breizh. Hogen hervez an Inrae (...) e vez 95 % eus ar skuilhañ amoniak diwar al labour-douar, 80 % anezhe diwar an desevel loened.

« N'eus tamm douetañs ebet ken war an dachenn skiantel : diwar an amoniak da gentañ e vez elfennoù moan, ar PM 2.5, o-unan o vezañ kaoz ma zo marvet kalz a dud re abred, ha n'eo ket kement gant kleñvedoù alaniñ evel gant kleñvedoù ar galon hag ar gwazhioù », hervez Jean-François Deleume, doktor war ar medisinerzh, ezel eus Dour ha Stêrioù Breizh. Ha gwir zo roet dezhañ en un danevell gant an institut alaman Max Planck, embannet e miz Meurzh 2019. Gant saotradur an aer gant an elfennoù moan e vefe kleñvedoù ar galon hag ar gwazhied, kleñvedoù alaniñ, ha krign-bev (an daou gaoz pennañ a varv e Frañs), ha diwarne 67 000 a dud o vervel re abred e Frañs. 19 000 ouzhpenn evit ar pezh a vez prizet gant Santé Publique France e 2016. Pet a dud a varv diwar an amoniak e Frañs da vat ?



Ur gaoz... na vez ket komzet anezhi e Breizh !

Kenkent ha 2006 e oa bet savet un danevell diwar-benn an amoniak gant Jean-François Piquot, mouezh-aotreet Dour ha Stêrioù Breizh, o niveriñ sifroù ar Citepa (kreizenn etremicherel teknik a studioù war saotradur an aer. E Breizh e oa 19 % eus an dileuskel eus ar gaz-mañ, NH3 e formulenn, er stad. Eizh vloaz diwezhatoc'h e oa bet skrivet gant Jean-François Deleume, hemañ e komite-ren ar programm-rannvro yec'hed endro (PRSE), da renerezh rannvro an endro hag al lojiri e Breizh (Dreal). « Breizh eo ar rannvro nemeti e Frañs saotret-daonet gant an amoniak », eme ar medisin, en ur gas fotoioù al loarell IASI, o tiskouez eo ruz-tan ar vro.

Stag ouzh al lizher, zo ur studi gant pennospital skol-veur Roazhon ha surentez sokial al labour-douar, o tiskouez e vez kleñvedoù alaniñ an desaverien saout-laezh e Breizh abalamour d'an danvez saotrañ implijet el labour-douar. Hervez Jean-François Deleume bepred, zo diskouezet muioc'h a verr-alan e bro Leon, e-lec'h emañ ar gwashañ saotradur gant an amoniak. War kartennoù arsellva Breizh e vez gwelet penaos e vez muioc'h a dud o vervel gant krign-bev ar bronkez hag ar skevent er vro-se ivez etre 2005 ha 2017.

« Da-heul al lizher e oa bet pellgomzet dimp gant servijoù ar prefeti ur sulvezh o c'houlenn ganimp : daoust ha pelec'h ho peus bet ar sifroù-mañ ? Ne vez tamm striv ebet a-berzh ar Stad da glask gouzout pelloc'h. Arabat komz eus ar sujed-mañ », eme Marie-Pascale Deleume, ijinoerez al labour-douar, hag ezelez eus Dour ha Stêrioù Breizh.

Ar paourañ e Frañs eo diwall kalite an aer e Breizh

Gant ministrerezh an treuzkemm ekologel hag ar c'hengred eo bet fiziet diwall kalite an aer e kevredigezhioù, Aer Breizh e Breizh. E miz Kerzu 2020 e oa bet staliet ur mekanik muzuliañ an amoniak e Merleag, en Aodoù-an-Arvor. Soñjet zo staliañ un eil e 2021. Amañ zo graet ur gammed war-raok rakkar na oa ket bet roet yalc'had ebet d'ar gevredigezh evit se betek-hen. Mann met abalamour n'eo ket lakaet ar gaz-mañ da vezañ danvez saotrañ da ziwall en aer e Frañs. Er c'hontrol d'an oksidoù azot, ozon pe metaloù ponner. Abaoe 2002 eo lakaet dindan evezh gant Aer Breizh, da gentañ e bro Lambal, e-lec'h emañ ar stankañ ar chatal en departamant. Betek 8 gwezh muioù a amoniak zo aze evit e bro Roazhon. Emañ an dachenn e-mesk ar re washañ tout, kumun Maroue peurgetket, hervez statistikoù ur studi savet en lzelvroioù e-pad 5 bloaz e fin ar bloavezhioù 1990.

Etre 2003 ha 2019 bepred zo aze eus ur vro na vez ket diwallet an amoniak enni : ne vo ket muzuliet ken war ar maez gant Aer Breizh. « Abalamour n'eus ket arc'hant evit se, eme c'hGael Lefeuvre, rener Aer Breizh. 60 000 € e teu un dielfenner amoniak nevez. Ma ne vez ket eus yalc'hadoù a-raok ar c'houlzadoù eveshaat n'heller ket arc'hantiñ seurt dafar hon-unan. » Bras-divent al labour evit ar gevredigezh, met daoust da se eo an hini baourañ e Frañs, gant ur budjed-bloaz 1,5 milion a euroioù, e tegas he rener da soñj. Gant un taos diwar an industriezh eo arc'hantet ar gevredigezh : an taos hollek war al labour saotrus. Hogen zo kalz nebeutoc'h a uzinoù e Breizh evit a venajoù. Diwar al labour-douar e vez ar muiañ a amoniak met ne vez ket eus an taos-mañ.

Darnel ar roadennoù, renabloù beskell

Etre 2008 ha 2016 eo kresket an amoniak a 3 %, hervez ur prizadur gant Aer Breizh, ha 14 % eus ar « produiñ » broadel zo e Breizh. Ha c'hoazh eo re izel ar sifroù-mañ rak derc'hel a reont kont eus disklêriadurioù an desaverien loened hag an industriezhioù klaset evit Diwall an endro (ICPE). Ha n'eus met ar menajoù o tremen ur serten live hag a rank disklêriañ pegement a amoniak a skarzont, se adalek 10 tonenn. Ar re vrasañ 'ta. En tu all da 40 000 plas evit ar yer, 2 000 evit ar moc'h ha 750 evit ar gwizi. Uhel al liveoù evel-just, a-raok al lobbying gant an FNSEA, peogwir e 2013, e oa kaoz eus 450 a voc'h. « Evit ma vo ar resisañ hor renabloù e vefe ret ma vefe an diskleriadennoù adalek an donenn gentañ », war a lâz Gaël Lefeuvre.

[1] evit Breizh velestradurel emañ ar sifroù embannet en enklask-mañ.

[2] <https://www.citepa.org/fr/2020-nh3/>

Ne rank ket an desaverien saout disklêriañ pegement a amoniak e produont avat. Ha bras an touell peogwir eo diaes-mat lakaat saout da beuriñ pa vez 200 pe 400 anezhe. Pelloc'h e vez ar saout er c'hreier 'ta. Just a-walc'h, hervez kambr labour-douar Breizh e vefe bet 22 % a amoniak skarzhet e-keit-se e 2016. Da lâret eo an eil saotradur war-lerc'h ar skuilhañ hañvouez (23 %). Da-heul emañ an desevel moc'h (21 %) ha yer (19 %).

Kutuilhet Frañs gant Brusel

« Evit a sell diwall an endro e vez ret a-walc'h kompren penaos ne vez den oc'h ober strivoù hep reolennoù strizh », a bouez Gaël Lefeuvre. Dre Europa a-bezh e oa bet lakaet ret heuliañ ur sturiadur gant an Unvaniezh e 2016. Dre se e ranke ar Stad c'hall ober evit ma vo bihanaet an amoniak skarzhet en aer a 13 % ac'hann da 2030. Ar pezh zo eo kresket a 6,7 % etre 2005 ha 2016... Start e vo !

E Miz Mae 2020 e oa bet graet ur poent kentañ gant Unvaniezh Europa. Ha sklaer an traoù : evel m'emañ ne vo ket dalc'het he gouestl gant ar Stad c'hall. Abaoe 2006 eo stabil-tre ar skarzhañ NH3 er stad. Etre 2016 ha 2019 e tiskenn a 3 % hepken. « Diwezhat eo bet emskiant an dud e Frañs ha kemeret zo re nebeut a vuzulioù strizh », hervez bodad an arc'hant er Sened er pennad amoniak en he danevell war politikerezh ar stourm ouzh saotradur an aer, daou viz diwezhatoc'h.

« N'eo ket abalamour zo re nebeut a enklaskoù akademek e c'heller lâret zo diouer a evezh politikel evel zo bremañ », eme Emmanuelle Lavaine, Philippe Majerus ha Nicolas Treich en ur pennad embannet e miz Du 2020 e kelaouenn skol ekonomiezh Tolosa. « Gant an diouer a ouiziegezh skiantel e rankfe bezañ labourer ha n'eo ket chom hep ober netra abalamour da ziwall end-eeun ».

An desaverien e penn kentañ ar saotradur



Jean-François Monier / AFP

Emskiant eo bed al labour-douar eus an dalc'h evit ar yec'hed : ar re gentañ paket eo an desaverien. Hervez an Inrae, « zo bet diskouezet liammoù etre saotradur an aer ha kleñvedoù ar skevent gant al labourerien. An darn vrasañ eus kleñvedoù alaniñ diwar ar vicher zo reoù evel bronkit pe berr-alan end-eeun ».

E 2015 e oa bet lañset ar raktres « aer desaverien » gant kambr labour-douar Breizh. En ur studi zo lakaet war-wel penaos en em gav an desaverien skoet gant an amoniak, ar poultrenn hag ar produioù kimiek en un 40

a staliou yer pe moc'h. E labourioù evel soagnal al loened e vez tapet en tu all d'al liveoù uhelañ aotreet, ha fallaet an alaniñ. Diwar se e oa bet kaset ur blaketenn displegañ d'an holl desaverien er rannvro. Kinniget zo ur

stummadur dezhe hag abaoe kreiz ar bloavezh 2018 zo pemp video e-linenn.

E 2018 bepred e oa bet lakaet un norm kentañ (na oa ket ret, kement ha reiñ da c'hoût tra ken) gant an Anses, Ajañs Vroadel Surentez Yec'hedel ar Boued, an Endro hag al Labour, a $500 \mu\text{g}/\text{m}^3$, evit ar riskloù ingal. Ne veze dalc'het met an efedoù war an alaniñ, dre « n'eo ket bet studiet ar riskl a grign-bev diwar an amoniak dre alaniñ evit an dud hag al loened », hervez an Anses. N'en em glev ket an holl skiantourien war an norm-mañ 'vat. Pemp gwezh nebeutoc'h a redi zo enni evit e meur a Stad amerikan. Pa oa ar muzulioù kentañ e Lamball gant Aer Breizh e oa bet kemeret da referañs $100 \mu\text{g}/\text{m}^3$, ur referañs lakaet e 1991 gant Ajañs diwall an endro er Stadoù-Unanet (EPA).

A-benn bihanaat ar skarzhañ NH_3 hag elfennoù e oa bet savet ur sturlevr broadel war an doareoù mat el labour-douar gant an Ademe e 2019. Reizhañ ar magañ loened, ingaliñ ar merañ teil ha hañvouez, gwellaat ar gwentañ er savadurioù, goloñ ar foziadoù hañvouez, choaz an temzoù an nebeutañ a amoniak diwarne, hiraat an amzer ma vez al loened o peuriñ, h.a. « Met mont war yeot adarre ne vez ket lakaet trawalc'h war-wel », eme Estelle Le Guern, gant keuz, homañ karget a gefridi e Dour ha Stêrioù Breizh. Gwelloc'h e vefe ganti e vefe « adheñchet al labour-douar da gaout doareoù ober na vefent ket ken saotrus all. » Uhel ar bazenn pa vez 95 % eus ar moc'h e Frañs e-barzh savadurioù ordin, war klouedennoù, diblouz. Gwellañ tra d'ober 'ta, bihanaat ar chatal.

D'an 31 a viz Meurzh 2021 e oa bet embannet gant ministrerezh al labour-douar hag ar boued ur steuñv d'ober hep an ostilhoù skuilhañ saotrusañ a-benn 2025. Daou vloaz war-lerc'h ar poent a oa bet lakaet er steuñv broadel da nebeutaat an danvezioù saotrañ en aer (Prépa). Tri abeg pennañ d'an dale-mañ, e-mesk traoù all : an dilañs war ar c'hevez diwar muzulioù redius, ar riskl direizh evit an desaverien baour, met ivez pouez politikel bed al labour-douar.

Muioc'h a amzer laosket gant ar brodrierien temz diwar azot



Kae an Timac e St-Maloù, a zo un embregerezh perzh eus ar produer temz Roullier. Jean-Philippe Corre / Splann !

Da gentañ eo nac'het gant ar gouarnamant ar c'hinnig graet da-geñver emglev ar sitoianed war an hin, e-kerzh ma oa studiet al lezenn war an arc'hant en diskar-amzer 2020. An abeg da se ? Ur riskl uhel da goll kevezusted, hag ur gounid dister evit an endro, eme servijoù ministrerezh al labour-douar, ar rener kabined anezhe o vezañ bet unan eus pennoù bras ar stroll Roullier (kaoz a vo eus ar stroll e trede pennad Splann !). Gwir an dra zo eus Frañs ar marc'had kentañ en Europa evit an temz diwar azot.

Distro ar muzul gant ar raktres lezenn « climat et résilience », kinniget gant ar galloud erounit, met disteraet ar stumm anezhañ. A-benn 2024 eo kaset da vezañ lakaet e pleustr, un termen n'a ket gant ar pezh zo gortozet da vezañ graet ouzh cheñchamant an hin, eme ar c'huzul meur war an hin. E fin miz Meurzh zo asantet ar soñj da sevel un taos gant an deputeed, mann met ma n'eo ket diskennet ar skarzhañ protoksid azot hag amoniak a-hed daou vloaz. Ha koulskoude emañ a-du an holl pell zo da lâret zo ezhomm eus ur seurt ostilh. E miz C'hwevrer 2020 e oa roet ar goulenn-mañ da anavezout gant renerezh an teñzor publik hag adalek 2013 dija gant kuzul ekonomikel, sokial hag an endro. Evit an OCDE eo abaoe 1986 e oa savet ar c'hinnig-mañ...

En ur bilañs da c'hortoz war ar steuñv da vihanaat ar skarzhañ danvez saotrus evit an aer evit ar c'houlzad 2017-2021 eo diskouezet an holl draoù bet graet e bed al labour-douar e Frañs. Hervez an diell-mañ a zo en hor c'herz, n'eus bet heuliet da vat nemet nebeut-kaer eus ar muzulioù-mañ. Da skouer evit a sell an ober muioc'h gant ostilhoù skuilhañ teil na vefent ket ken saotrus. Na ne vez ket lakaet ar gaoz war an debriñ nebeutoc'h a gig evel zo aliet en ur studi embannet en Aktoù Akademiezh ar Skiantoù er Stadoù-Unanet. Gant se e c'heller derc'hel da stankaat ar chatal, hag ar galloudoù foran da leuskel ober.

Caroline Trouillet, Splann !




AN AMONIAK,

HARP KENTAÑ INDUSTRIEZH AL LABOUR-DOUAR

Ouzhpenn ur poz skiantel zo eus an amoniak. En hor c'horf zo anezhañ ha mont a ra en endro e stumm ur gaz. Gant danvez organek o vreinañ ec'h an NH3 en douar diwar ar plant hag al loened. Al lodenn vrasañ eus ar gaz en aer zo diwar o divankadenn. Abaoe ur c'hantved 'vat zo eus an amoniak ur produ industriel ivez.

E 1909 e oa bet krouet an donenn amoniak kentañ a-benn aozañ danvez-tarzh, ha war un dro industrielaat al labour-douar. Un temz pinvidik evit ar gounid boued zo anezhañ ha promesaoù gounit kalz. Betek re... Ur c'hantved diwezhatoc'h e vez gwerzhet 130 milion a donennoù azot er bed e stumm temz. Skuilhet war ar parkeier e skarzont amoniak en aer, evel pa vez skuilhet hañvouez. Diwar an amoniak e vez elfennoù moan ken int moan war-lerc'h, hag a c'hell tremen dre ar skevent d'ar gwad.

Lakaet int da vezañ pennkaoz da varv 48 000 a dud re abred e Frañs, hervez Yec'hed Publik Frañs. Hervez ar Sened e vefe koustet 100 000 miliard a euroioù e 2015. Evelkent eo damsklaer an traoù hag e c'hellfe ar sifrou-mañ bezañ dindan ar wirionez.



LODENN 2

INDUSTRIELERIEIEN HA STROLLEGEZHIOÙ O C'HOARI DA VAT EVIT AN AMONIAK

Daoust d'an dañjerioù evit yec'hed al labourerien, an dud diwar-dro hag an endro e tremen Breizh hebiou d'an dalc'h stag ouzh an amoniak. Distraet gant ar strollegezhioù ha bed ar gounezvouederezh ec'h a ar skarzhañ NH₃ war washaat a-blasoù. Ha gwashañ tra e vez sikourioù publik bras d'ar saotrierien vras, darn anezhe e-maez lezenn.

Pesked marv a-vil-vern, o c'horf en aer, war-neuñv en dour lous-teil. D'an 2 aviz Ebrel 2021 e oa bet saotret ar Peñnez, ur stêr e Bro-Leon gant un distaol teil dre aksidant, o tont eus un atant industriel. Skoet ar besketarierien, an dud diwar-dro ha naturelourien gant se. Mont a ra an degouezh da-heul un hir a listennad a stêrioù bet saotret daonet gant an amoniak. Un toullad mizvezhioù a-raok se eo ar Stêr-Aon, a oa bet skoet gant 400 000 litrad dilaostajoù o tont eus ur metanizer. Kement a amoniak a oa ken e oa chomet 180 000 a dud hep dour eus ar c'hog e-pad 5 devezh. War wel emañ sort degouezhioù met dre se ne vez ket gwelet reoù all, evel e Sant-Maloù, m'o devoa an dud alonet aer louzet gant amoniak e-pad 15 vloaz kazi sur (da lenn en hor pennad diwar-benn an Timac, pennad diwezhañ an heuliad).

Daoust d'an traoù lakaet e plas e live ar Stad a-benn bihanaat an amoniak eo an hent kontrol an hini zo tapet e Breizh. Stalioù-yeer ha kreier-moc'h ezdouar, stankoc'h-stankañ, metanizaat a-live an industriezh (bezañ zo ar metanizaat un teknologiezh da broduiñ energiezh diwar difankadennoù al loened)... Dalc'het e vez gant ar saotrañ, gwashoc'h-gwashañ a-blasoù, ha mont a ra ar strollegezhioù hebiou d'ar skoilh.

Sikourioù publik bras da saotrierien vras...



Jean-François Monier / AFP

An uzin Biogaz Kastellin, perzh er stroll Engie, an hini zo atebeg eus saotradur ar stêr-Aon en hañv 2020, daou vloaz hepken goude bezañ bet digoret. Evit bezañ lañset e oa bet degaset arc'hant publik. 900 000 € digant an Ademe, 797 950 € digant Ajañs an Dour, 150 000 € digant Kuzul Departamant Penn-ar-Bed. E bro Leon emañ an SA Kerjean, ar menaj industriel kaoz da distruj ekosistem ar Peñnez, e-mesk ar pemp lec'h ma vez skarzhet ar muiañ a amoniak e Breizh. Hag unan eus ar feurmioù sikouret ar muiañ gant ar PAC (politikerezh boutin al labour-douar) : 98 000 € a sikourioù

e 2019. En ur c'hoût zo un 60 % eus al labourerien-douar o c'hounit nebeutoc'h evit 20 000 € bep bloaz.

En Treoù-Leon e oa bet saotret spontus stêr Daoulaz gant 200 000 litrad hañvouez o tont eus an EARL Keropartz e 2019. Pa oa ur prosez da vezañ evit ar goañv eo bet Olivier Allain besprezidant ar rannvro e karg eus al labour-douar ha war ar renk evit an dilennadegoù rannvro war listennad LREM ar besprezidant bet Thierry Burlot, er menaj ha graet meuleudi dezhañ. 50 000 € a yalc'hadoù zo bet degaset d'an EARL.

Kumuniezhioù kumunioù zo a vez dreist ar re all evit a sell ar souten da stalioù riskloù bras enne a skarzhañ amoniak betek re. Gant hini Loudieg da skouer zo bet votet goude tabut bras 178 500 € d'ur raktres pevar metanizer, ar re-se o vezañ arc'hantet kalz gant ar Stad dija. Gwashoc'h c'hoazh : harpañ a ra LLDC Algae, ar vrasañ stal da c'hounit mikrovezhin en Europa, gant 130 000 € dre un urzh-prenañ en anv ar c'hempouezañ el labour-douar. Hogen eo paket LLDC Algae en aferioù justis evit bezañ distrujet tachenoù gleb pe savet traoù hep aotre. Ouzhpenn-se e oa bet lakaet dindan evezh gant ar prefeti e miz Eost 2020 evit bezañ meret al lostajoù desevel en ur mod euzhus : steuñv skuilhañ ebet, fozadoù dour-teil a vez o tiverañ en endro...

Strollegezhioù a ya en tu-enep d'ar pezh aliet a-live ar Stad

Studiet don hon eus raktresoù kempenn ar vro savet gant ar strollegezhioù, hag int a-gostez d'an ezhommoù bras. Bepred eo se a zeu war-wel e studi an alioù rentet er mizvezhioù diwezhañ gant ar Bodad Rannvro Aotrouniezh an Endro (MRAE), ur servij melestradurel publik e karg da reiñ e ali war sort dielloù.

Er steuñv Hin, Aer, Energiezh (PCAET) e Leñv Arvor Kumuniezh e embann an MRAE penaos « n'eus lakaet pal ebet evit a sell ar bihanaat skarzhañ dioksid soufr, danvez organek hag amoniak, pezh zo un diouer en dec'hel kont eus an ezhommoù broadel zo da nebeutaat an danvezioù saotrus-mañ ». Koulskoude he deus ar vro da welet gant ar raktres da sevel daou vetanizer e Plouc'ha (Aodoù-an-Arvor).

E bro Leon emañ an MRAE o'n em c'houlenn war kalite ar PCAET evit an endro e Lesneven Aodoù ar Mojennoù. « Memestra zo d'en em c'houlenn gant ar pal nebeutaat an dileuskel amoniak, pell dindan ar palioù broadel ha rannvroel, rakkar amañ zo eus unan eus ar skoilhoù pennañ er vro ». Ha kement all e PCAET an amezeien, bro Hirwazh Kumuniezh. Ar « Steuñv Kevanlen tiriadel » (Scot) e bro Gwengamp n'eus ennañ netra tout evit a sell kalite an aer. Hag e tolpad kêrioù Felger, m'emañ ar produiñ amoniak a 35 % en tu all d'ar geidenn e Breizh, ne vez ket displeget dre ar munud er PCAET petra eo orin an danvezioù saotrañ en aer, na penaos ober evit lakaat bihanaat anezhe kennebeut all. Hag evit rannvro Breizh, a zo o sevel he frogramm Feder (Fontoù Europat evit an Diorren Rannvroel) hag FSE (Fontoù Sokial Europat) evit ar bloavezhioù 2021-2027, zo rebechet gant an MRAE « un doser hag a embann n'eus ket a skog war an endro gant ar fedoù-se, un arguzenniñ graet prim ken ha ken ». Ha se evit a sell an amoniak o nijal kuit peurgetket, un dra n'eus ket dalc'het kont anezhañ da vat, hervez an MRAE.

Deomp da c'houzout n'eus bet degaset respont ebet en doserioù emamp a-baouez menegiñ (n'eo ket ret d'ar strollegezhioù hen ober), nemet evit bro Gwengamp, met respont ebet evit a sell an danvez saotrañ an aer. Evit ar bras eus an doserioù all emaint c'hoazh war sevel hag enklaskoù publik war ober pe da zont.

Raktresoù ac'h a da washaat an dileuskel NH3

La MRAE ausculte aussi l'étude d'impact environnemental produite par le porteur d'un projet d'exploitation. Studiet pizh e vez ivez gant an MRAE ar skog war an endro degaset gant ar re e-soñj da zigeriñ menajoù pa vezont bras a-walc'h da vezañ klaset dañjerus evit an endro (ICPE), ha dindan ur redi da vezañ aotreet. Ar re vrasañ 'ta. Pa vez kistion da vrasaat stalioù desevel moc'h pe staliañ metanizerioù e vez lakaet e ali e doser an enklask foran. Un ali kuzuliañ tra ken.

N'eus nemet teurel ur sell war avizoù Aotrouniezh an endro e Breizh a-hed an daou vloavezh diwezhañ evit en em rentañ kont eo dister diwall an amoniak... « Ur sapre skog zo gant an amoniak dilaosket diwar al lec'h desevel loened, pe vefe en e stumm aezhenn pe vefe er c'houezhadennoù e stumm azot pellik pe pellikoc'h. Se ne vez ket studiet a-walc'h », a glemm ar servij melestradurel en e aviz evit a sell sevel ur stal-yeur er Yeuc'h, e Kerne Izel. « diwall kalite endro an dourioù n'eo ket gwarantet a-walc'h abalamour na vez ket dalc'het kont eus ar c'houezhadennoù azot diwar amoniak ».

Kement all a vez klevet evit a sell brasaat ur vagerezh voc'h e Pluvaodan (Aodoù-an-Arvor). « N'eo ket dielfennet a-walc'h skog ar c'houezhadennoù azot war an endro naturel en doser, en ur zalc'hen kont eus ar menajoù diwar-dro ivez ». E Brengolou (22) zo embannet kement all gant an MRAE c'hoazh, diasur an traoù abalamour d'an diouer a studioù ha d'ar re a amoniak produet, ar wezh-mañ evit ur raktres brasaat ha bodañ krevier-moc'h. Ha da glozañ : « ne respont ket studi ar skog war an endro bet kinniget d'ar redioù lakaet e kod an endro, ha n'eus ket aze eus ur gwir briziadur diwar-benn an endro ».

Ha sur zo tapet skouerioù arouezius gant ur seurt ali ivez, evel ar raktres da sevel ur stal-yeur 120 000 penn enni e Laoulan e bro Bourlet (Morbihan). Sklaer eo ali an MRAE ken eo sklaer evit ur gludeg a vefe enni betek 22 pe 30 yar dre vetrad karez : « ar skogoù a c'hell bezañ gant an talariñ pe an dilaoskadennoù ha kouezhadennoù amoniak en aer ne vezont ket dielfennet. (...) Ar skogoù diwar se war an endro ne vezont ket studiet ».

« Daoust hag e c'hell padout gant an doareoù-mañ d'ober ? »

En Breizh emañ an hanter eus ar stalioù desevel loened dindan reoliadur an ICPE (sellet ouzh kartenn an ICPE e Frañs). Diwar se eo splann e vez uhel-mat al liveoù a amoniak dilaosket war an dachenn, eme an MRAE evel e Landunvez ma zo goulennet eeunaat ur menaj desevel moc'h unnek mil loen ennañ. Un dra « n'eus ket da vezañ disteraet », evit an Aotrouniezh evit an endro. « Ar riskloù en ur verniañ efedoù an holl feurmioù diwar-dro ne c'hell ket bezañ lâret da vezañ izel, er c'hontrol d'ar pezh zo lakaet en doser ». Emañ Landunvez e bro Leon, ur vro m'eo stank an dileuskel amoniak, gwashoc'h evit e lec'h all (sellout ouzh hor c'hartenn). Ha seul taol e vez kistion eus ar berniañ-mañ etre an holl feurmioù, e pep aviz studiet gant hor c'hazetennerien.

Er Yeuc'h, hervez an MRAE, « n'eus ket dalc'het kont en doser eus ar berniañ dilaoskadennoù asambles gant

ar feurmioù desevel loened diwar-dro, ha koulskoude emaint stank tri c'hilometrad war-dro d'al lec'h (...). Ar berniañ ha meskaj a demzoù en aer war-dro d'an traoñiennoù, ha da gentañ gant an atant e-tal kichen, a vez lakaet er-maez, hep tamm displegadenn ebet ». Evit brasaat ar c'hraou-moc'h e Brengolou n'eus ket bet kaoz eus ar berniañ dilaoskadennoù amoniak en aer ivez, daoust ma zo eizh feurm desevel loened klaset ICPE war-dro. Gwir an dra n'eo ket aezet-kaer priziañ an efedoù-berniañ-mañ. Dizanavez a-walc'h eo ar c'houezhadennoù azot, ha dizingal ar muzulioù amoniak en aer e Breizh. Ouzhpenn-se e vez start-mat goût sifroù an dileuskel amoniak dre venaj digant ar servijoù melestradurel. Goloñ ar fozadoù hañvouez, implijout gouzer gwelloc'h, magañ al loened gant traoù all... Strivoù a vez graet gant ar re o tougen raktresoù feurmioù desevel loened klaset ICPE a-benn derc'hel kont eus an amoniak en o studioù a skogoù. Met ha pa vijent o toujañ d'ar reoliadur e vez gwashaet ar riskloù a saotradur lec'hel gant ar bodañ pe brasaat menajoù hag ar raktresoù nevez. Keuz he deus Aotrouniezh an Endro e Breizh na vefe ket sellet ouzh ar studioù skogoù er feurmioù-se met eus tu ar reolenn, ha n'eo ket gant al lojik disteraat an nozout d'an endro.



SARL Avel Vor e Landunvez – Gwel Loarel : Ar skol, tachenn-c'hoari ar vugale hag ur c'harter annez savet da 200 metrad eus poullou-hañvouez (tapadenn-skramm Google maps).

Ur skoilh c'hoazh : muzulioù zo a vez gwelet evel talvoudus gant bed al labour-douar na vezont ket lakaet e pleustr, abalamour d'ar c'houst anezhe. Gwir eo kement-mañ evit ar stal-yer e Laoulan, e-lec'h na vefe ket staliet a ostilh da buraat an aer da skouer.

Ha darn all ha na zeuont ket a-benn da chom dindan al liveoù aotreet a dap digant ar prefeti e vefe direizhet d'ar reolenn evite pa soñj gante n'hellont ket ober gant an teknikoù gwellañ zo... dre ma vezont re ger ! Gwir eo se e Brengolou.

Da lâret eo kazi sur ne vefe ket trawalc'h a c'hounidoù evit menajoù bras zo ma vefe lakaet pep tra a c'hellfe bihanaat an dilaoskadennoù a amoniak e pleustr. Met hervez ur c'homiser enklasker emañ an dalc'h en a-raok : a-raok kavout ostilhoù da nebeutaat ar skogoù fall, « e pep priziadur war an endro e vez ranket diskouez e vez bet graet pep tra da dremen hep na vefe anezhe. Ar pezh na vez ket graet. Lâret 'vo : « graet zo eus ar gwellañ, 'hend all 'vo graet freuz-stal ». Ya, met n'eo ket un arguzenn war dachenn an endro ! Ma rank an ezhomm a gevezusted kas betek traoù dañjerus evit an endro evel zo bet, evit ar yec'hed pe ar vro, petore amzer da zont evit an doare labour-douar-mañ » ?

Ne vez redi ebet diwar ali an MRAE, met ret e vez d'ar re o tougen raktresoù respont dezhañ. Peurliesañ en em ziskargont en ur lâret e toujont d'ar reolenn, evel darn eus ar skouerioù meneget amañ. Alies avat evit a sell an amoniak e respontont hebiou. Da skouer gant ar menajer e Brengolou, amezeg anezhañ da eizh tachenn klaset ICPE. Evitañ « n'eus ket a efedoù berniet splann ». Met war un dro e asant e-unan penaos « dre ziouer a ditouroù ouzhpenn eo dibosupl muzuliañ an efedoù berniet er feurmioù-mañ » !

En desped d'an enklaskerien war ar medisinerezh hag a embann muioc'h-mui war an dañjerioù evit ar yec'hed

e talc'h an hini zo o kas ar raktres e Laoulan gant e soñj, « diwar-benn an amoniak e c'heller lâret krenn n'eus ket a riskloù evit yec'hed an dud ». D'ar raktres-mañ, talet outañ, eo 50 000 € zo da vezañ degaset gant ar rannvro. Hag ouzhpenn ur souten arc'hant zo dezhañ : e-kerzh an enklask publik e oa bet lakaet un aviz a-du gantañ gant besprezidant ar rannvro e karg eus al labour-douar Olivier Allain. « N'on ket evit krediñ, eme hor c'homiser enklasker test. Kement-mañ zo lakaat gwask war ar c'homiser enklasker, splann an dra »! Ha n'emañ ket e-unan : Kaset zo souten d'ar raktres gant an FDSEA, prezidant ar c'huzul-departamant, François Goulard (LR), maer ar gumun ha darn eus besprezidanted Kumuniezh ar Roue Morvan ivez...

Kevrannek eo ar rannvro e-tal industrielerien

E Breizh zo diorroet ur strategiezh souten gant ar strollegezhioù, met en tu-hont da se ur strategiezh diorren filierenn ar gounezvouederezh war hir dermen, an hini a zegas ar muiañ a bostoù-labour er rannvro. Gant se e vez klasket degas nerzh d'an stalioù bras hag a zilaosk kalz a amoniak. Dre se zo ur gazoduk tost da gant kilometrad anezhañ da vont eus Pleiben da Bleuwigner. Ar pal eo suraat ar pourvezañ gaz e Breizh... Met n'eo ket 'walc'h se, staget e vefe outañ ur 124 bennaket a vetanizerioù nevez ivez ! Ostilhoù a zegas goulennoù diwar-benn an amoniak c'hoazh. Gant rannvro Breizh hag an Ademe eo bet harpet ar metanizaat dre veur a yalc'had arc'hant.

Met ar pep heverkañ eo ar sammad bras-daonet a arc'hant bet postet gant ar rannvro e kevala embregerezhioù industriezh al labour-douar. 2 vilion a euroioù eo al lodenn he deus degaset en SAS Yer Breizh, a vez lazhet gantañ 340 000 a yer e Kastellin bemdez. Kevrannek eo ar rannvro hiviziken, just evel LDC pe ar Saoudian Almunajem, hag ivez Terrena pe Eureden. Un taol kentañ evit ur rannvro e Frañs, lañset dindan ren Loig Chesnais-Girard (PS), war ar renk da vezañ addilennet. Prometet zo 20 milion a euroioù evit souten filierenn ar yer, a zegas 19 % eus an dilaoskadennoù amoniak, hervez kambr labour-douar Breizh.

Ha ne chom ket pell eus ar c'hoari unan eus ar re vrasañ er bed ekonomikel e Breizh, ha bed an gounezvouederezh. Savet eo bet Eureden diwar ar bodañ etre Triskalia ha D'Aucy. Ha lorc'h enne oc'h embann « en tu all d'ur milion a vetradoù karez a stalioù-yer e Breizh » ha 650 lec'h da zesevel moc'h. Degaset he deus rannvro Breizh 5 milion a euroioù da vont da gevranneg. Trawalc'h da gaout aon na vefe ket sklaer an darempredoù etre politikerezh ar rannvro hag industriezh al labour-douar... diwar-goust kalite aer ar Vretoned.

Yann-Malo Kerbrat, Splann !



LODENN 3

TEMZ HAG AMONIAK MASKLET E SANT-MALOÙ

Iskevredad eo an Timac eus ar stroll roullier, ur pezh embregerezh gwerzhañ temz. Didrouz eo bet diorreet e labour aozañ temz diwar azot e Sant-Maloù. Pemzek vloavezh ur produiñ risklus-kaer, hep bezañ gwelet. N'eo diwallet nemet abaoe 2017, goude bezañ dilesket ur gaz saotrus, an amoniak, betek pemzek gwezh muioc'h evit an norm aotreet. Sed amañ ur sell war un hir a vankadenn a-berzh ar galloudoù foran.

E-kreiz porzh kenwerzh Sant-Maloù emañ an uzin Timac abaoe tri-ugent vloaz. A-hed 500 m ha 250 m led zo hangarioù o fenestroù faos, siloioù ha siminalioù warne. Ha liv zo roet d'ar skeudenn industriel-mañ gant mokedasennoù tev ha teñval o vont da-gaout ar c'houmoul, ha miliadoù a seier temz, glas ha gwenn. Pemp kant metrad pelloc'h a-denn-askell emañ ar mogerennoù hag an aod (diell 1 kartenn ar porzh). Kentañ lec'h touristel e Breizh eo Sant-Maloù, e-lec'h e vez ur milion a dud o tont bep bloaz. hag dre lec'h e tremen 416 210 tonenn a demz ha produioù kimiek ivez (diell 2 bilañs obererezhioù ar porzh). Ha gwir emañ an hanter eus al labour kenwerzh war ar porzh gant un aozer temz, roullier, dre uzinoù e iskevredad Timac.

Abae ma oa bet savet e 1959 gant Daniel roullier eo kresket ar stroll hag an Timac en ur frikañ merl, bezhin kouralus a vez graet gante evit temziñ douar-labour trenk. Un tri-ugent vloaz diwezhatoc'h e vez gwerzhet 4,6 milion a donennoù temz dre ar bed gant an implijer kentañ e Sant-Maloù. ha tost da 340 000 anezhe aozet e Sant-Maloù en div uzin war ar porzh, unan all war un dachenn industriel. Koulskoude eo reolenet an uzin war ar porzh, tost da vezañ klaset Seveso, abaoe 2006 evit frikañ danvez maenel, met n'eo ket evit fardañ temz diwar azot... ac'h a d'ober 45 % eus ar produiñ. Dre se n'eus ket bet diwallet ouzh saotradur an aer e Sant-Maloù gant an amoniak e-pad 15 vloaz.

Mont a ra an Timac pell en tu all d'al liveoù aotreet evit a sell ar saotrañ gant amoniak

« *Bremañ n'oc'h ket evit en em rentañ kont, met pa vezer kustum e vez santet raktal, ur c'hwezh patatez brein. Diwar se e vez heget an nen, en e c'hlaourgennoù, e c'hoûg, e fri, e zaoulagad, evel bezañ allergik* », eme ur plac'h eus ar vro, Pascale Nowicki, en ur fronañ an aer adalek ul leurenn en ti-gar, e-tal kichen ar porzh kenwerzh. Tost d'an dachenn industriel e-lec'h m'emañ o chom e tegas Caroline Ruffaut ouzhpenn: « Kement a c'hwezh a vez ken na vez ket tu da vont el liorz a-wezhioù. Goloet e vez hor c'hirri-tan, ar gwer, gant ur wiskad saotradur ». N'emaint ket o-unan o vezañ ankeniet evel-se. Galvet eo bet an Timac dirak ar barner e Mae 2020 gant daouzek den hag ar gevredigezh sitoianed Osons ! evit «trubuihoù direizh en amezegezh». Daou vizvezh diwezhatoc'h e oa lez-varn Sant-Maloù o tigeriñ ur prizacherezh da-gaout obererezh an embregerezh. A-benn miz Du 2021 eo gortozet an danevell.

Da-heul torradennoù lezenn stank gant an embregerezh emañ an diviz. Etre 2017 ha 2020 zo aet amoniak e-maez e siminaloù pell en tu all d'al live aotreet, lakaet da 50 mg/m³ dre arete gant ar ministr. Hervez un danevell (diell 3) gant renerezh rannvro an en-dro, ar c'hempenn, hag al lojiri (Dreal) embannet d'an 28 a viz Genver 2020 e oa bet tapet barroù saotrañ e 2019, gant c'hwezek devezh e-maez lezenn e miz Here ha pevar devezh warn-ugent e miz Du. d'ar 26, 30, 30 a viz Here, ha d'ar c'hentañ hag eil a viz Du e oa bet tapet daouzek gwezh an norm lakaet.

Hogen en danevell-mañ end-eeun e vez desket penaos « e-kerzh un emvod d'an 11 a viz Kerzu 2019 en devoa embannet ar c'horvoer e oa emskiant eus ar riskl bras a zilaoskadennoù aezhennoù diwar ar produioù savet gantañ. Dre ma oa unan eus produioù pennañ ar stal en deus dalc'het gant ar produiñ memes tra ».

Pemzek vloavezh a broduiñ azot hep disklêriañ



« Ma ne vije ket staget Roullier da labourat gant an azot er bloavezhioù 2000 ne vije ket eus an uzin e Sant-Maloù ken, zo displeget gant unan eus pennoù bras an Timac. Met n'eo ket bet meret mat ar mod aozañ. » Poltred : Jean-Philippe Corre - Splann !

An temz azotek, diwar sulfat amoniakek, eo ar produ pennañ-mañ. A-hed daou-ugent vloaz eo kresket ar goulenn anezhañ e Frañs eus un drederenn. « Ma ne vije ket staget Roullier da labourat gant an azot er bloavezhioù 2000 ne vije ket eus an uzin e Sant-Maloù ken, zo displeget gant unan eus pennoù bras an Timac. Met n'eo ket bet meret mat ar mod aozañ ».

N'eo ket met e penn kentañ 2015 e oa krog an Dreal da soursial. Galvet gant tud diwar-dro, ar c'hevredigezhioù Dour ha Stêrioù Breizh

hag Osons !, he devoa goûlet gant an Timac studial pizh ar pezh a gase en aer. Deskrivet eo ar rezultajoù en ul lizher d'ar prefed gant rener an Dreal, Sébastien Molet e miz Gouere 2018 (diell 4) : « an dilaoskadennoù renablet gant an embreger (...), etre 5 ha 10 gwezh uheloc'h evit al live aotreet (...), a rafe dezhañ bezañ an hini kentañ er rannvro hag an deket hini e Frañs. Ar muzulioù a ra ma vo ranket lakaat an uzin dindan evezh dibaouez evit a sell an amoniak en he dilaoskajoù. N'eus doujet da hini ebet eus an erskrivadurioù-se ». N'eus ket respontet an Timac da c'houlennoù « Splann ! »

Ar stern ma vez lakaet ar vistri industri a-benn diwall o skog war an en-dro a vez hervez ar produioù a lâront ober gante, hag o-unan e vezont da brizañ an dañjerioù anezhe. « n'eus ket en doser an Timac eus produiñ temz kimiek, pezh a ra evit gwir. Kentoc'h eo reoliet evit ar frikañ danvez maenel. Ar pezh zo ledan ken ec'h eo, ha na c'houlenn ket e vefe dilaosket amoniak », hervez Sébastien Molet. Ha gwir n'eus ket embannet an embreger bezañ cheñchet doare-ober pemzek vloaz abretoc'h en ur vont da-gaout ar produiñ gant azot. Anzavet en deus

an Timac kement-mañ d'an Dreal e-kerzh un emvod d'an 28 a vi Mae 2018, evel zo testeniekaet en ul lizher a-berzh ar prefed kaset d'an embregerezh, d'an 13 a viz Even 2018 (diell 5). N'eo ket dister ar vankadenn. Tapet hon eus kavout un diell eus an Timac o stadañ ar produiñ e 2017. 74 000 a donennoù a broduioù, oc'h ober 45 % eus kementadoù an uzin war ar porzh, a oa diwar azot, hag a veze skarzhet amoniak diwarne. En ur vont war an uzinoù all e vez tapet 226 139 a donennoù, da lâras 66 %. En ur c'hoût « emañ [an amoniak] en orin elfennoù moan n'eus ket da ziskouez pegen noazus int ken », eme ar prefed e-unan el lizher-mañ eus an 13 a viz Even.

Poultrenn diwar amoniak hag aksidantoù al labour : liamm ebet etreze, eme an Timac

E 2004 dija e oa bet paket ur c'hobradez gant se : « war ar c'hae diabarzh e oa hor burevioù, e-tal kichen al lec'h produiñ, kazi e-barzh. E fin ur goañvezh em boa klevet c'hwezhioù euzhus er burev, savet diwar goumoul poultrennek. Alies e veze devezhioù a-seurt-se. Dalc'het em boa da labourat, betek ma oan kouezhet war an douar. Digevassav alaniñ, stokad berranal, biskoazh n'em boa bet kement all », e kont Jessica. Anavezet eo bet an aksidant labour gant ar surentez sokial, met sevel a ra an Timac a-enep d'an diviz, betek mont dirak lez-varn aferioù ar surentez sokial (Tass), goude bezañ skarzhet anezhi abalamour d'an dic'houest ma oa da labourat. « Ar gwashañ walleur din-me eo bezañ anvet ar c'hwezh, an amoniak, rak o deus ar pennoù bras nac'het e raent gantañ », evel e teu da soñj da Jessica, kimiourez dre he micher ha stummadur. E-touesk an daou zen e karg bet renet hec'h emgav skarzhañ e oa Jean-Luc Favre, sekretour meur an Timac. Tri bloavezh war-lerc'h e teu da vezañ prezidant ar Yec'hed war al labour e bro Sant-Maloù (STSM), ur post m'emañ e karg e 2021 bepred.

E-keit ma oa Jessica gant he bloavezh diwezhañ er stal, ha hi gant louzeier kreñv, e oa bet roet un ali kontrol gant an Ddass da c'houlenn korvoiñ an Timac (diell 6) d'ar 24 a viz Du 2005. Ha da embann ne dalveze « evit netra, hag e oa dreistmuzul ha diazezet diwar netra » ar pezh a lâre an embregerezh penaos « na oa bet lakaet skog ebet war-wel war yec'hed an dud diwar-dro ». Da-heul ar respontoù degaset gant an embregerezh e talc'he an Ddass gant he zu : « ret eo ma vo engouestloù kreñv ». Daoust d'an ali-mañ e oa bet roet un ali en tu mat gant ar c'homiser enklasker hag ensellerezh ar staliadurioù klasket ha roet e aotre gant ar prefed e 2006.

Ur studi re verr war ar riskloù evit ar yec'hed

« Raktal war-lerc'h ma oa lakaet an torr-lezenn war-wel e oa bet fellet deomp respont d'ar goulenn-mañ : peseurt skogoù war yec'hed an dud ? », hervez Vincent Lagoguey, isprefed Sant-Maloù abaoe miz Gouere 2018. Deut e oa ur respont gant ur burev studi, ar GES, en un danevell e miz Genver 2020 : « en ur gontañ e vefe ingal an dud ouzh stok an danvez saotrus e vefe izel ar riskl evit o yec'hed. ».

Daoust da se ne seblant ket e vefe serr an doser. Luzietoc'h evit se eo afer an amoniak evit ar yec'hed, mont a ra pelloc'h evit klozadur ar GES, arc'hantet gant an Timac ha renet gant un ijinour a vez tabut warnañ, Christian



E-kichen un takad tiezh emañ labouradeg Timac Agro, e Sant-Maloù. Lod a amezeien a lâr o deus poant en o gorf, hag e viche aezhenn fall. Poltred : Jean-Philippe Corre - Splann !

Buson. Kustum eo eus sort consulting evit mistri industri ar gonezvouederezh, hemañ prezidant ensavadur teknikel ha skiantel an en-dro, krouet e-mesk reoù all gant Lactalis, d'Aucy ha Doux e 1996. Sekretour meur kevredigezh c'hall ar re na gredont ket e cheñchamant an hin (AFCO) eo ivez. E 2012 en devoa skrivet : « war dachenn ar yec'hed, n'eus tamm skog ebet gant dilaoskadennoù amoniak en aer ». D'ar c'houlz-se e oa anavezet an NH₃ da vezañ danvez saotrus a oa kaoz da elfennoù moan en aer (Erisman and Schaap, 2004).

Bepred, evit sevel e jedadennoù diwar-benn dilaoskadennoù an Timac, en devoa graet ar GES gant al live diwall lakaet e 2018 gant an Anses : 0,5 mg amoniak dre m³. Pelloc'h evit se e vez paket fall an alaniñ. « Brav 'walc'h eo c'hoazh ma ne vez ket tapet al live-mañ e Sant-Maloù rak e tiskouez efedoù war ar yec'hed diouzhtu », eme c'hGaël Lefeuvre, rener Air Breizh, ar gevredigezh a ziwall kalite an aer e Breizh (AASQA). N'emañ ket ali an holl skiantourien war al live diwall lakaet. Liveoù pemp gwezh izeloc'h zo lakaet gant stadoù amerikan zo : 0,1 mg/m³ en aer. « Keñveriañ a ra ar GES liveoù gant un efed war yec'hed an dud kazi diouzhtu e stalioù industriel, ouzh liveoù en aer. N'int ket memes skeulioù. Ret e vije sellet ouzh al live amoniak a-hed ur bloavezh, pe meur a hini zo kaeroc'h a-benn kompren da-vat peseurt live o deus an dud da daliñ outañ », hervez Gaël Lefeuvre.

Dre ma n'eo ket an amoniak e Frañs ur produ saotrus reolennet en aer (s.o. Pennad 1), n'a ket studi ebet ken pell se e Sant-Maloù. Memes ta e oa bet priziet an dilaoskadennoù e 2016 gant Air Breizh : 36 tonenn amoniak evit ar gêr, 403 tonenn evit an tolpad kêrioù. Hep derc'hel kont eus dilaostajoù industriel an Timac, dre ma na vezent ket disklêriet a-raok 2017. En ur c'hoût en do skarzhet e-unan 43 ha 46 tonenn an daou vloavezh war-lerc'h, hervez al lec'hienn géorisques, a laka anezhañ e penn ar renkadur e Breizh (sellet ouzh hor c'hartenn).

Un dra c'hoazh n'eus ket bet sellet gant ar GES ouzh un danvez saotrus all a ra kalz an amoniak evitañ : an elfennoù moan-tre. PM 2,5 a vez graet anezhe, diwarne e vez kleñvedoù ar galon hag ar gwazhied, alaniñ, ha krign-bev, pennkaoz da 67 000 marv re abred e Frañs, hervez un danevell gant an ensavadur alamant Max Planck (s.o. Pennad 1). Lañset en deus Air Breizh ur c'houlzad muzuliañ e Sant-Maloù abaoe miz Gouere 2020. Gortozet zo ur bilañs evit an hañv. E 2018 ha 2019 e oa bet diskouezet gant ar gevredigezh dija penaos ar geidenn PM 10 a oa etre 10 % ha 30 % uheloc'h evit e Roazon pe Sant Brieg. Met n'eus nemet ar PM 2,5, moanoc'h, hag a dremen dre ar skevent ha dre se o deus or skog war ar yec'hed.

Goulennoù zo gant ar re a dud o vervel gant ar c'hrign-bev



Gant Rozenn Perrot eo bet kemeret perzh en emvodoù aozet en is-prefeti Sant-Maloù, gant Dour ha Stêrioù Breizh. A-drugarez da stourm an dud eo bet lakaet ar peadra da evezhiañ ouzh an amoniak a vez dilaosket gant an Timac. Poltred : Jean-Philippe Corre – Splann !

A-hed daou vloavezh e-maez lezenn eo bet rediet an Timac d'ober evit ma vo cheñchet penn d'ar vzh gant ar prefed ha div dell-gastiz en deus bet, 5 000 € ha 1 500 € (dielloù 7 hag 8). da lâras a-boan ma tap 0,004 % eus e sifr a aferioù diwezhañ anavezet, e 2006. Embannet en deus an Timac bezañ kaset e labour produiñ saotrusañ gant an amoniak da-gaout uzinoù all, ha bezañ postet 3 milion a euroioù evit mont diouzh an normoù.

Bepred e miz 2021 en deus graet an Dreal

evit adtapout pemzek vloavezh a-dreuz en ur enskrivañ redioù an Timac en un arete gant ar prefed. Hiviziken e rank ar stal diwall e zilaoskadennoù amoniak a-hed an amzer. Rankout a ra ivez analizañ ar metaloù ponner er mogedennoù, ha na oa ket bet graet betek hen. Kement-mañ a oa goulenn Dour ha Stêrioù Breizh, emañ Rozenn Perrot en hec'h anv e Sant-Maloù. Gwir eo zo d'en em c'houlenn. E 2016 ha 2017 e oa bet lakaet war-wel gant Dreal Charente-Maritime penaos e oa aet an Timac en tu all d'al liveoù aotreet e plom ha metaloù ponner all, en hec'h uzin e Tonnay Charente.

Gortozet mat eo an enklask-mañ rakkar emañ dourioù porzh Sant-Maloù da vezañ diwallet dija. En danevell diwezhañ gant rouedad diwall ar porzhioù (REPOM), embannet e 2012, ha dielfennadennoù an DDTM e 2018, zo diskouezet penaos eo Sant-Maloù ar porzh saotret ar muiañ gant plom, merkur, kouevr ha zink e Breizh. Hag an hini nemetañ ma vez diskouezet Kadmium e ruz. N'eus bet kaset enklask ebet evit goût hag-eñ eo ar charren temz kaoz ma zo eus ar metaloù amañ, met da ziwall zo sur gant ar c'hadmium : diwarnañ e vez krign-bev a-sur, hervez an OMS. War al labour eo dre alaniñ e vez tapet ar muiañ. Pezh eo emañ ar c'hadmium en un danvez krai, ar fosfat, a vez enporzhiet gant an Timac, eus bro Aljeria ha Maroko, evit aozañ temz. Diskarget e vez war ar porzh, kaset dre gennioù, en ur laoskel poultrennoù moan da nijal kuit, ha friket en uzin. Daoust hag-eñ e vefe fallaet an aer e Sant-Maloù gant ar fosfat ivez ?

N'eo ket traoù dister an enklaskoù-mañ e Sant-Maloù, pa seller ouzh bilañs lec'hel ar yec'hed (diell 9). E miz Gwengolo 2019 e tiskoueze e oa ur re a dud a 11% o vervel gant ar c'hrign-bev en tolpad kêrioù. Gant Arsellva Rannvro ar Yec'hed e oa bet diskouezet etre 2000 ha 2006 dija penaos e oa 45 % a baotred ouzhpenn evit ar geidenn vroadel o vervel gant krign-bev an treizher hag ar gorzailhenn.

D'ar 26 a viz Ebrel 2016 e oa bet skrivet d'ar c'huzul-kêr gant Philippe Thévenet, medisin-koazhadour en

ospital Sant-Maloù : « emañ an holl dud o labourat hag ar re glañv amañ da daliñ ouzh c'hwezhioù euzhus. Splann eo zo kaoz eus aer saotret, an orin anezhañ war ar porzh. Pa vez flaeriusoc'h e klemm ar goskored e vez start dezhe alaniñ, treizhañ boued, hag eus poanioù neurologek ». Dre ma ne oa respont ebet d'e lizher, en devoa adc'halvet d'ar 24 a viz C'hwevrer 2020, ur mizvezh war-lerc'h ma oa bet embannet e zanevell gant ar GES en ur resisaat e oa « servij yec'hed ar vugale ar gwashañ paket gant ar saotradur-mañ ».

Caroline Trouillet, Splann !



NE RA KET TROUZ

AR GALLOUDOÙ FORAN GANT AN AFER

Ar c'hevredigezhioù Dour ha Stêrioù Breizh ha Breizh Vev eo o deus kelaouet ar sitoianed hag an dilennidi rannvro. « Kaset eo bet keloù ar redioù da gêr Sant-Maloù ha da Roullier gant servijoù ar prefeti met n'int ket bet kaset d'ar rannvro. Amañ zo ur vankadenn a gelaouiñ. Ne vezer ket kelaouet eus tuioù fall mod ober an industriel gant ar Stad. Roet hon eus dezhi da c'hoût », a lâr ur c'huzulier rannvro kozh deomp, hemañ gwelloc'h gantañ chom hep reiñ e anv. Claude Renoult e penn anezhañ betek miz Even 2020, n'eus ket graet ar c'huzul-kêr muioc'h a drouz war-dro d'an afer, hag-eñ e oa ankeniet an dud. « Abaoe 20 vloaz n'eus bet maer ebet o tivizout ober war-dro da skog an industriezh da vat. Diouer a gouraj, emgontrollerezh, mignonaj, soñjet e vez int gallodus, gant se n'eomp ket da glask laou dezhe », eme an dilennad kozh c'hoazh.

Ret eo lâret penaos eo soutenet ar stroll Roullier gant an dilennidi, dre m'en deus postet kalz a arc'hant war ar porzh. Da skouer gant Kreizenn Vroadel an Nevezadur (CMI) ur savadur nevez-flamm, o tegemer 200 ijinour war ar magañ loened ha plant, arc'hantet gant un amprestadenn tost da 50 million a euroioù digant Bank Europat ar Postadurioù (BEI). D'ar 7 a viz Ebrel 2014 e oa bet igoret ar maen kentañ, gant Jean-Yves An Drian e-unan, e-kichen Claude Renoult, maer nevez-dilennet. « Roullier n'heller ket tremen heptañ gant an implijoù a zegas e Dinarzh ha Sant-Maloù, eme ur plac'h eus ar gêr, lakaet hec'h anv ganti war ul listennad en tu-enep en dilennadegoù-kêr diwezhañ. Kreñv-mat eo e zalc'h war ar porzh ».



Carte de localisation des sites TIMAC AGRO à Saint-Malo (35)

UR ROUEDAD LEVEZON

WAR GÊR AR GOURSERIEN BETEK EUROPA

A-orin Kleub an Tregont e oa Daniel Roullier, ul lobby o vodañ an industrielerien e Breizh ar muiañ a levezon gante. Diazezet en devoa anezhañ e Sant-Maloù, er gambr kenwerzh hag industrierezh (CCI), a oa prezidant anezhi e 1988. War an dachenn vroadel emañ ar stroll Roullier gant besprezidantelezh Unvaniezh Vroadel Industrierezh an Temzañ (Unifa).

Ouzhpenn-se eo holding ar stroll ezel eus pemp stroll levezoniñ liammet gant an temzoù. E 2019 he devoa bet ur yalc'had 758 440 € digant bodad Europa, peurgetket en anv ur programm anvet « difioù ar gevredigezh : cheñchamant an hin ha barregezhioù ».

Abaoe an hañv 2020 eo Fabrice Rigoulet-Roze penn meur burev ministr al labour-douar, Julien Denormandie. Fabrice Rigoulet-Roze, bet rener ar strategiezh er stroll Roullier etre 2008 ha 2011. « Graet e vez lobbying gant strolloù eveldomp. Ezhomm hon eus da gaout enarked », a respont unan eus pennoù bras kozh an Timac, hep bezañ souezhet.



Hangars de stockage de la Timac Agro à Saint-Malo. - Photo : Jean-Philippe Corre, Splannl

« BRETAGNE, BOL D'AIR À L'AMMONIAC »

LA PREMIÈRE ENQUÊTE DE « SPLANN ! »

Première région d'élevage de porcs, de vaches laitières et de volailles, le « garde-manger de la France » subit le contrecoup de son modèle intensif tourné vers l'exportation de produits à faible valeur ajoutée. Si le problème des algues vertes est maintenant connu de tous, une autre pollution, plus insidieuse, est la source d'un grave problème de santé public : l'ammoniac. Emis principalement lors des épandages de lisier, de fumier et d'engrais de synthèse, ce gaz est un précurseur majeur des particules fines qui causent des dizaines de milliers de morts prématurées en France chaque année.

Dans cette première enquête en trois volets, « Splann ! » met en lumière le laxisme des pouvoirs publics. En dépit des efforts de quelques associations et lanceurs d'alerte, la surveillance des émissions bretonnes d'ammoniac n'avance qu'à petits pas. L'association Air Breizh agréée par l'Etat pour fournir des données officielles mais largement sous-financée, ne dispose que d'un seul analyseur fixe et ce depuis cette année.

Seuls les plus gros élevages de porcs et de volaille sont contraints de déclarer leurs émissions annuelles, depuis le relèvement des seuils obtenus en 2013 par la FNSEA. Quand l'Autorité environnementale est invitée à donner son avis sur des extensions de fermes ou des constructions de méthaniseurs, ses recommandations sont soigneusement mises de côté. L'obtention des subventions n'est pas conditionnée à la réduction du tonnage d'ammoniac et le gouvernement refuse d'instaurer la redevance sur les engrais azoté proposée par la Convention citoyenne sur le climat. Une inertie qui profite à certains industriels de la chimie, intégrés dans les cercles du pouvoir, et vis-à-vis desquels les autorités font l'objet de négligences coupables depuis des décennies.

Quant à la réduction substantielle des cheptels, identifiée comme le chemin le plus rapide et le plus efficace pour réduire la pollution atmosphérique dans une étude publiée en mai 2021 par les Actes de l'Académie des sciences des Etats-Unis, elle n'est pas au programme.

Dans ces conditions, la Bretagne augmente toujours ses émissions. Elle éloigne ainsi la France des 13 % de baisse fixés pour 2030 par la directive européenne NEC, à partir des données de 2005. Un objectif jugé insuffisant par les défenseurs de l'environnement lors de son adoption.

Placer l'ammoniac dans le débat public

Travaillant à partir de données publiques, « Splann ! » propose une cartographie inédite des émissions d'ammoniac en Bretagne, qui permet d'identifier plusieurs secteurs ruraux particulièrement concernés. Les villes n'en sont pas moins touchées car c'est en se combinant avec des polluants issus notamment du trafic routier que l'ammoniac se transforme en particules fines responsables de morts prématurées.

A travers cette enquête, « Splann ! » espère déplacer le problème de l'ammoniac agricole des cénacles d'érudits vers l'agora. Face aux catastrophes écologiques qui obscurcissent la perspective d'un avenir désirable, nous croyons à un journalisme d'intervention qui contribue à l'amélioration des pratiques. Aux citoyennes et citoyens de se saisir de ces informations d'intérêt public et de demander des comptes à leurs représentant-es élu-es.

Cette enquête au long cours débutée en septembre 2020 a été réalisée par la journaliste Caroline Trouillet, accompagnée par un comité éditorial composé de cinq journalistes professionnels qui interviennent ici à titre bénévole. Pierre Corbin est l'auteur des modélisations cartographiques. Tudual Karluer a traduit les textes en breton. Les articles et documents sont mis à la disposition du public gratuitement grâce à Mediapart, France 3 Bretagne, le réseau Radio Breizh (en breton) et Le Peuple Breton (en breton). D'autres volets suivront sur le sujet.

Ce travail a été entièrement financé par des dons, versés à 92 % par des particuliers et à 8 % par des associations, au premier rang desquelles Les Amis de La Terre. En date du 16 juin, « Splann ! » a collecté [au total 73.000 € grâce au financement participatif](#) via la plateforme HelloAsso, nous assurant de produire plusieurs autres enquêtes ambitieuses, en français et breton. Plus gros contributeurs, Les Amis de la Terre a versé 3 000 € et BDZH a distribué les 1 700 € lui restant après dissolution. « Splann ! » ne veut recevoir ni subvention ni mécénat d'entreprise, par souci d'indépendance. De plus, aucune fondation ne peut verser plus de 10 % du budget annuel de l'association. Aucune intervention éditoriale des donateurs n'est admise.

L'équipe de Splann !





Peta eo Splann ! ?

Splann ! a zo ur gevredigezh (mod lezhenn 1901) a zo he fal dezhi kas da benn enklaskoù-kazetenniñ poellek evit an dud e Breizh hag ar bed, e galleg ha brezhoneg. E Bro Dreger, e Gwengamp, emañ staliet.

Vous avez connaissance de faits qui portent atteinte à l'intérêt public ?

Contactez-nous de manière sécurisée et confidentielle

contact@splann.org

3, place du Champ-au-Roy, 22200 Guingamp

Donnez pour l'enquête indépendante sur [Splann.org](https://splann.org)

Retrouvez-nous sur les réseaux :



@Splannenquetes



@Splannenquetes



Splann lanceur
d'enquêtes



@Splannenquetes



Splann

